

KANNADIG Imbourc'h



Kelaouenn *Emglev An Tiegezhioù* niv. 107 Here - Kerzu 2018 Priz : 3€

Kenderc'hel war-raok

Poent kemmadur Kannadig Imbourc'h a zo erruet, ur youl nevez a glaskerezh, a imbourc'herezh war-du un dazont klodus hag ur blanedenn welloc'h evit Breizh, war-du ar Gouloù Gwenn. Dibabet eo bet kemm anv hor c'hannadig gant ar soñj gwellaat e zoare war un dro, pinvidikaat e bennadoù, lieskementiñ niver

e bajennoù, o kenderc'hel da glask war-lerc'h ar pezh a zo gwir a-enep d'ar pezh a zo gaou, o kerzhout bepred e gouloù an deiz a-enep da

deñvalijenn an noz, etrezek ar pal a zo tonket da Vreizh c'hoarvezout, eleze tizhout un oadvezh aour nevez un deiz dazont. Un oadvezh kreñv, keltiek, glan, sakr, un oadvezh a unaniezh pa vevemp gwechall en dizunvaniezh, un oadvezh a araokaat pa vevemp gwechall war an diskar, un oadvezh a vrezhoneg pa neuieimp gwechall e geunioù ar galleg, un oadvezh wenn eta, liv ar baradoz e bro ar Vrezhoned. Neveziñ hor c'hannadig a fell deomp ober. Kavout kenskriverien nevez, koumananterien nevez, a-benn asuriñ ur vouezh wirion d'ar vroadelourien vrezhon, rak petra hon eus-ni evel danvez preder hiziv an deiz hag a vefe brezhonek ? Gwall dreut eo ar peuriñ en amzerioù diaes-mañ. Ha koulskoude, lavaret e vez e vefe ar vroadelouriezh o tont en-dro en Europa, kontet e vez e savfe en-dro ar boblelouriezh e bed ar C'hornog, hogen e Breizh, broad treuzwelus, dister, peuzvarv, blev, evel re alies. Bez' ez eus an emsav kleizelour, ha brezhonek a-walc'h, abaoe pell, met hennezh ne gerzh ket war-du an

hevelep uhelvennad eveldomp. Bez' ez eus ivez eus an emsav broadelour gallek, bihanoc'h un tamm marteze, ha diskor a-walc'h. Met evidomp-ni, ar vroadelourien vrezhonek, n'eus ket kalz a dra da voueta hor mennozhioù. Hor plas a vennomp kemer, hor gwelidigezh a vennomp diskouez, hon enor a vennomp difenn,

ha lavarout hor ger. Gwelout a reomp lod o kuitaat an emsav, heuget gant emzalc'hioù tud 'zo, pe digalon-ekaet dirak braster divent ar chanter.

AR GOULOU
Gwenn



Gwelout a reomp lod all o komz en anv Breizh met oc'h oberiañ en un doare a gav deomp ne zere ket ouzh hor bro, ha dreist-holl, gwelout a reomp an darn vrasañ eus hor pobl kousket mik, pe gwashoc'h c'hoazh, aet gall, arallekaet, ha laouen en he soton. Kement-se holl a hañval deomp bezañ direizh, hag e-se eo hon eus ar meizhad e tleomp ober un dra bennak evit klask gwellaat hor mad boutin, ar pezh a garomp dreist pep tra : hor gwlad.

P'emañ Kannadig Imbourc'h o krakvevañ abaoe ur pennadig amzer, e-unan war e dammig hent, p'hon eus bet ar soñj paouez gantañ zoken, hon eus divizet a-barzh fin ar gont e vefe entanusoc'h, ha frealzusoc'h, kenderc'hel war-raok en ur argemmañ elfennoù 'zo anezhañ evit dedennañ muioc'h a dud ha ledanaat evel-se heklev hor mouezh. "*Ar Gouloù Gwenn*" eta, kelaouenn nevez a spered nevesaet, a glasko war hir dermen bezañ ur gelaouenn viziek. Fellout a ra deomp ivez gouestlañ pajennoù eus hor c'helaouenn d'ar c'heleier, broadel hag

etrevroadel. Evel-just ez omp beuzet mat a-walc'h hiziv an deiz dindan ar c'heleier koulz ha dindan ar c'heleier-faos, dre internet, dre ar skinwel, ha dre ar galleg mac'homus hogos bepred. Met ne rank ket mirout ouzhip da gaout hor savboent ha da ersaviñ en ur doare brezhon ouzh keleier ar bed en-dro deomp. Un eil lodenn e-barzh *Ar Gouloù Gwenn* a vo miret evit al lennegezh, pep hini a c'hallo kas skridoù deomp, danevelloù, barzhonegoù, kanaouennoù, troidigezhioù, pennadoù a skiant, a feiz, mennozhioù politikel. Gant ma kloto ouzh linenn vrezhon ar gelaouenn, da lavarout eo, Breizh a zo ur vro hag ur vro n'eo ket un takad dislivet nag ur gouelec'h. Ur vro a zo un douar resis annezet gant ur bobl resis, a ra d'an douar-se bezañ disheñvel diouzh an douaroù all tro-dro. Breizh a zo bro ar Vrezhoned, ha n'int ket n'eus forzh piv. Hon tadoù-kozh eo o doa divroet amañ en Arvorig, heñchet gant o sent, ha roet anv o bro gozh d'hor bro nevez : Breizh Vihan. Hag ar C'hallianed-ha-Romaned arvorigat a veve en o raok a zo bet mesket en o zouez ha lonket ganto en diwezh. Ar brezhoneg a zo deuet ganto koulz hag ar feiz kristen, en ur gas da netra ar gallianeg, al latin hag ar baganiezh kozh. Peogwir e anavezomp istor hor gwlad e komprenomp mat-tre argerzh an divroerezh. Hag e welomp re vat dañjer an enbroerezh estren e Breizh evit dazont ha buhez hor pobl. Pa n'omp ket mui dizalc'h, pa n'hon eus mui nag harzoù nag arme, pa 'z eo bet distrujet hor pobl vrezhoneger gwriennet, pa 'z eo bet diskaret ar feiz er vuhez peurbadel, e teu deomp sklaer evel lagad an naer kement-mañ : prest e vefe Breizh hiviziken da vezañ kaset da netra ur wech evit mat, prest e vefe ar Vrezhoned da guitaat gwazh-red an Istor. Un taol skub diwezhañ skoet ouzh revr ar bobl vrezhon dre zegas un niver un tamm re vras a enbroidi (gall, saoz, afrikan, turk...) ha setu penaos e vefe Breizh peurlonket er bed nevez kosmopolit. Setu petra eo, peogwir e fell deomp bezañ onest ha klask ar wirionez, hon aon brasañ. A-enep d'an traoù-se dreist-holl e fell deomp enebañ, hag a-du gant danvez Breizh dreist-holl e fell deomp bezañ. Setu petra e vo hor gouloù gwenn : hor salvidigezh. Evel ma oa hor roue Arzhur war glask ar Graal santel er vojenn, hag a oa salvidigezh ar Vrezhoned e Preden a-enep d'an alouberien saoz er fedoù istorel, e vimp-ni o stourm evit bezañ dellezek eus hor paradoz, tu bennak etre enez Avalon ha

rouantelezh an Neñvoù, hag er fedoù danvezel o stourm evit bleuniadur brav ar vrezhonelezh.

Liammañ an istor ouzh an dazont.

An anv-mañ, "gouloù gwenn", a zo ivez da dostaat ouzh an anv plac'h predenek Gologwenn. Un anv istorel ma 'z eus, pa voe anv ur vaouez vrezhon divroet eus Breizh-Veur d'an Arvorig e deroù ar VI^{vet} kantved. Ar Gologwenn-se a c'hanas ur mab war aodoù gwalarn an Arvorig a zeuas da vezañ Bro-Leon da c'houde, ur mab anvet Goulven hag eñ da vezañ diwezhatoc'h ar sant Goulven ken brudet e Breizh. Peadra a zo da gemer awen diouti. Evel-se e reomp ivez enor d'hon istor ha d'hon hengoun o c'houzout sellout ouzh an amzerioù tremenet da buñsañ awen, just a-walc'h, evit hor sikour da vont war-du an amzerioù dazont. Awen ha sikour hon eus ezhomm bras anezho. Bezañ awenet gant harozed evit reiñ deomp an nerzh a vank deomp. Bezañ levezonet gant ar gredenn ez eus sikour da gaout digant an dud-veur-se gant ma ouzimp penaos o fediñ da zont da reiñ an dorn deomp. Breizh ne gerzh ket mui war-raok rak an dud n'o deus ket mui feiz e netra. Bevezerien int deuet da vezañ, hag an tuckleiz a vo a-du ganeomp evit lavarout an dra-se. Daoust ha bevezerien a oa eus soudarded an armeoù brezhon a-wechall ? Tamm tout ebet. Stourm gant feiz, krediñ, setu ar pezh nemetañ a ro an trec'h. An dud difeiz eo a vez faezhet, n'eus nemet lenn an istor evit en kompren. Ra dregerno hol lugan dre ar vro : " Nevenoe ne oa ket dizoue ! " Un haroz, ur feiz. Un awen, un tonkadur.

Na chomit ket pelloc'h da dortal eta ! 40 koumananter oc'h-c'hwi hiziv an deiz. Ar c'hoant hon eus da dizhout an niver a 100 koumananter a-benn daou vloaz : dont a raimp a-benn dezhi a-drugarez deoc'h, hor c'hlaoustre kentañ an hini e vo. E miz Genver 2019, kemerit hep termal ur c'houmanant bloaziek nevez d'*Ar Gouloù Gwenn*, kelaouenn nevez met o tispenn roudoù Imbourc'h, ha kaset e vo deoc'h ur skouerenn ouzhpenn da niverenn Genver, digoust, deoc'h d'en profañ d'ur mignon brezhon deoc'h. Greomp holl bruderezh evit ar pezh a garomp hag evit ar gelaouenn vrezhon a zifenn hor mennozhioù. Ni, en eskemm d'ho kenlabourerezh, en em ouestl da gas deoc'h pemp niverenn er bloaz 2019, ha marteze c'hwec'h e 2020 ha daouzek e 2021, piv oar ? Klaskomp holl dihuniñ hor c'henvroidi. Roomp lañs d'un emsav nevez e Breizh, marteze ar

pevare hini a c'hortozomp abaoe ken pell. Mennet omp, ganeomp ur skipailh nevez, mennozhioù ha youl a zo, deuit da heul an avañtur eta. Ar gredenn hon eus e teuo Breizh da vezañ ur Vro hepdale hag e vo goveliet ar Vroad-se ganeomp a-gevret, pa gerzhomp war hent an istor. Rak na zisoñjomp morse an dra-

mañ : Breizh c'hall a zo ur fazi istorel, n'eo nag ar wirionez wir, na youl Doue. Kevarc'h da Vreizh vrezhon ha kevarc'h d'ar "Gouloù Gwenn !"

Tepod Mab Kerlevenez

Ar begennoù bedelour a-enep d'ar pobloù

Dibabet em eus talbenn va fennad en ur soñjal e levr ar Gall Michel Geoffroy "La Super classe mondiale contre les peuples" (ar Gourrenkad-bed a-enep d'ar pobloù), Éditions Via Romana, 2018, rak war an hevelep danvez, tamm pe damm, eo va frederiadenn, hag e rin, meur a wech, dave da bajennoù e levr.

Bez' e c'hellfe marteze ar brederiadenn-mañ bezañ krennet er frazenn-se digant Daniel Cohn-Bendit en doa lavaret da geñver disoc'h ar poblaters a-zivout ar *Brexit* ha ne oa ket a-du gantañ evel-just : "Ret eo paouez da lavarout emañ bepred ar gwir gant ar bobl". Komz a ra bepred ar begennoù¹ politikel eus an demokratelezh, a vefe da zifenn ha da bennluskañ dre ar bed a-bezh, graet eo bet zoken brezelioù evit degas an demokratelezh da lod pobloù, soñjit er brezelioù en Irak pe Afghanistan. Hogen, pa vez goulennet hec'h ali digant ar bobl, da skouer evit mouezhiañ evit raklun Bonreizh Unaniezh Europa e 2005, anvet Feur-emglev Maastricht, hag ar respont ne voe ket an hini a c'hortoze ar begennoù, e voe tamallet ar boblelourion, doareet "poblachourion" evit an degouezh, sañset bezañ kiriek eus an "Nann", da vezañ a-enep an araokaat, da vezañ faskour, da vezañ livet gevier d'ar bobl... E-lec'h lavarout : "Komzet he deus ar bobl, plegomp da vouezh ar bobl peogwir he deus komzet an demokratelezh", e voe iriennet kerkent gant ar begennoù-se un doare all da c'hounit ar "Ya" : ar wech-mañ ne voe pedet da reiñ o ali nemet ar C'hannaded hag ar Senedourion, hag a-unvouezh, tost da vat, e voe respontet Ya, hag e voe Feur-Emglev Lizbon e 2009. Ar wech-mañ e oa sklaer, un troc'h a oa etre ar begennoù hag ar pobloù. A-enep dezho e oant.

¹ Ar begennoù : *les élites*.

Hogen, daoust hag e c'heller lavarout ez eo ar begennoù-se izili eus ar "Gourrenkad-bed² bedelour", nann evel-just, ne c'heller ket, rak un darn vat anezho a zo hepken heulierion, hag evit lod, "beulkeed servijus" ar Reizhiad, brigadennet tost hep gouzout dezho, gant ar meziennoù e servij ar Gourrenkad-bed. Evit ar pennoù-strollad politikel, ez eo un tammig disheñvel peogwir ez eo int a ro an urzh da vouezhiañ er ster-se.

War-lerc'h ar vouezhiadeg-se, evit Feur-emglev Lizbon, e voe dibikouzet daoulagad kalz a dud en Europa, ha tostoc'h ouzhomp gant arvest dorioù Europa digoret-bras d'an enbroerezh/alouberezh hep goulenn o asant digant ar pobloù, a zo koulskoude ar re gentañ kensellet gant an diaezamantoù degaset gant an alouberezh-se, pa vez gwarezet ar renerion gant servijoù kêrreizh ar Stadoù. An dibikouzadur-se en em wiriekaas da c'houde gant un niver bepred brasoc'h a dud o vouezhiañ evit ar strolladoù poblelour en dilennadegoù.

Petra eo ar Gourrenkad-bed pennlusker ur gouarnamant-bed ?

"E gwirionez n'eo netra estreget ar galloud armerzhel ha kellidoel, direolet ha bedelaet en eil hanterenn an ugentvet kantved. Rak e 1989, war-lerc'h steuziadur ar begozh komunour, en em laka an arc'hwel³ marc'hadour da ren pep tra er C'hornog" a ziskler Michel Geoffroy, en un dazaters gant an daouvizieg *Monde & Vie*, niv. 960, Gwengolo 2018. Diouzh un tu all e c'heller stadañ e oa seulabred en egin ar c'hoant-se da ren pep tra en Europa hag er bed, gant dispac'herion 1789, ha mard e oant renket dreist-holl en Trede-Urzh ne oa ket en o zouez kalz kouerion ha micherourion met bourc'hizion, breutaerion, marc'hadourion, bankerion...

² Gourrenkad : *Upper Class, Super Classe*.

³ Arc'hwel : *fonction*

Evel ma-z eo bet diskouezet, peurgetket gant labourioù Georges Dumezil, e oa azonet⁴ henamzer Europa dre aozadur ar gevredigezh hervez urzhaz an arc'hwelioù sokial. En nec'h edo arc'hwel ar riegozh⁵ en he div vent : kravezel ha gouarnamantel (aotrouniezh ha galloudegezh). War-lerc'h edo an arc'hwel brezelel embleget⁶ d'an hini kentañ pe e vijemp bet en un diktaturiezh bellourel. En diwezh edo an arc'hwel a genderc'h hag a varc'had. C'hwitet en deus an Dispac'h gall war e daol da freuzañ an urzhaz-se a-benn ar fin, dre m'en deus arveret ar feulster, ar spont, an euzh, hag ar bobl a zo en em savet a-enep dezhañ. Gant ar Gourrenkad-bed ez eo renet an traoù en un doare kalz soutiloc'h, en un doare gorrek a-walc'h evit ma ne welfe ket an dud emañ an traoù oc'h emdreiñ diwar o c'houst, ha ma-z eus koulskoude diwallerion a glask lakaat ar bobl war evezh e vez graet ar seizh gwellañ evit ober dezho tevel dre lezennoù fardet a-ratozh. A benn ar fin e vez arveret gant ar Gourrenkad-bed pennaenn ran Galvani, e-lec'h ur ran lakaet en dour yen da gentañ en em lez da boazhañ tamm-ha-tamm, pa vez tommet an dour betek birviñ ; en enep mar bez splujet ur ran war-eeun en dour tomm, ez ersav kerkent hag e lamm er-maez. Ne vez ket buket gant ar Gourrenkad-bed kreñvaat ur vroad, a vefe Stadoù Unanet Amerika da skouer, hogen en enep da zistroadañ ha da zispenn an holl vroadoù evit diazezañ e c'halloud ha ne vefe ket evodet eus ar riegozh politikel hogen eus galloud an arc'hant, distrobet eus an holl vevennoù, da lavarout eo, ur gouarnamant-bed.

Penaos e vez aozet hag urzhiet ar Gourrenkad-bed ?

Bez' e c'heller, dre vras, diforc'hañ pevar kelc'h pe rouedad treuzvroadel o kenframmañ ar Gourrenkad-bed, a verk Michel Geoffroy : kelc'h ar vegenn armerzhel ha kellidel, kelc'h ar meziennoù hag ar sevenadur, kelc'h an aozadurioù nann-gouarnamantel (ONG/ANG), ha da ziwezh kelc'h ar begennoù publik.

Kelc'h ar vegenn armerzhel ha kellidel bedel.

E-kreiz ar Gourrenkad-bed en em zalc'h evel-just ar vegenn armerzhel ha kellidel bedel : atebeion an ensavadurioù kellidel etrevroadel hag ar bankoù kreiz, renerion an

embregerezhioù bras treuzvroadel, an oberataerion gellidel bras hag an dud pinvidikañ er bed, ha d'an nebeutañ er broioù kornogat. Kreizet e vez gant ar c'helc'h-se ar braz eus pinvidigezh ar bed. Hervez an ABU (onu) e vefe reoliet 85% eus ar pinvidigezhioù gant 10% eus poblañs ar bed.

Kelc'h ar meziennoù hag ar sevenadur.

Hervez ar gredenn boblek e oa ar gwask ur gourzhgalloud⁷ ret d'an demokratiezh hag ar c'helaouenner ur paotr kenhoalus reizher ar gwalloù, o stourm evit ar wirionez hag ar justiz e-enep d'ar re c'halloudek ha d'al laeron, hogen, ne glot ket ar skeudenn-se ken gant ar gwirvoud hiziv er bed kornogat. Ar meziennoù n'int ket ken hiviziken gourzhgalloudoù hogen rodaouegoù ar galloud, rak deuet eo ar meziennoù bras (*mainstream*) da vezañ perc'hentiezh ar bankoù bras hag an embregerezhioù bras bedelaet, a levezon ivez an darn vrasañ eus ar gouarnamantoù e Kornog-Europa. Ouzhpenn-se, ar bruderezh a zegas un tamm mat a arc'hant d'ar gwask a zo etre daouarn un nebeut amseziou⁸ bruderezh perc'hennet gant tud eus ar Gourrenkad-bed. Diwall d'ar re a embann traoù a zisplij dezho, rak buan e vez serret tuellenn arc'hant ar bruderezh. Perak e vez postet arc'hant er gwask gant an dreist-pinvidion pa n'eus ket arc'hant da c'hounit peogwir e vez skoret bep bloaz ar c'helaouennoù gant ar Stad pe e vije ret dezho freuzañ stal ? Eeun eo ar respont rak evel-se e c'hell ar Gourrenkad-bed levezonañ al lennerion er ster ma fell dezhañ, war-zu ur gouarnamant-bed, ha ma-z eus kelaouennerion ha na fell ket dezho emblegañ d'al linenn-stur-se, e kollont na-mui-na-maes o labour. Anavezet hon eus nevez 'zo kelaouennerion pe skrivagnerion bet kaset kuit evel-se diouzh o stael. Ha mar c'hoarvez d'un nebeut digemplegerion-se⁹ en em unaniñ evit krouiñ ur vezienn dazeilat¹⁰, dre ar genroued dreist-holl, e vez kavet buan un araez bennak evit ober dezho tevel, dre ober prosezioù dezho, hervez lezennoù fardet a-ratozh evit-se, pe, nevez' zo, lezenn ar "*Fake News*" mennet gant ar prezidant Macron, pe evit ul lavar doareet a "gasoni" a-enep islamidigezh Europa...

⁷ Gourzhgalloud : *contre-pouvoir*.

⁸ Amsez : *agence*.

⁹ Digempleger : *anticonformiste*

¹⁰ Dazeilat : *alternatif*.

⁴ Azonet : *caractérisé*.

⁵ Riegozh : *souveraineté*.

⁶ Embleget : *soumis*.

Ar c'horralvez¹¹ **sevenadurel** : lankañ¹² a ra ar meziennoù an digor d'ar sevenadur, hag aotren a reont da bennluskañ ar meizad eus an arz hag ar sevenadur mennet gant gourrenkad-bed, e-pad ma klaskont, diouzh an tu all, lakaat an tav war ar skrivagnerion, ar grouerion hag an arzourion ha ne fell ket dezho en em silañ er moull. Mesened ar c'hantvedoù tremenet a boste o arc'hant da skoazellañ arzourion o amzer da genderc'hañ pennoberoù a vez lorc'h ha pinvidigezh mirdioù Europa hiziv, hag a vez priziet gant an holl. Mesened ar gourrenkad-bed a bennlusk e pelec'h an hevelep arz anvet kempred troc'het diouzh destloù¹³ an arz europat. Penn-mouzh dre vras a ra ar pobloù ouzh an tebet arz arnevez ha kempred, met ne ra forzh, diogeliñ a ra bevañs ur rouedad brizh-arzourion (*cultureux*) a zeu da vezañ evel-se dleourion o mesened bedelour.

Arabat eo ankounac'haat **pennoù ar Show business** oc'h amparañ¹⁴ un adkaser¹⁵ prizius evit skignidigezh kealiadurezh ar gourrenkad-bed. Evit gwir ez eo bet arveret ar fiñvskeudennerezh, hini Hollywood, evit skignañ "*american way of live*" dre ar bed abezh hag un adkaser galloudek eus an holl gemmadurioù kevredigezhel : dispac'h revel, dizimez, heñvelreviezh, sioc'hanañ... O vezañ ma-z eo dleour an dremmourion¹⁶ da dud ar gourrenkad-bed, perc'henned kompagnunezhioù ar fiñvskeudennerezh, evit o goprou uhel-kenañ hag o buhez pompadus, e ouzont trugarekaat o mesened pa vez goulennet outo. Da skouer, da geñver an dilennadegoù en USA, sinet eo bet gant tost an holl dremmourion amerikan ervennadoù a-enep Donald Trump, ha n'eo ket ur bedelour daoust dezhañ bezañ pinvidik, ur broadelour eo, ar pezh a zo ur pec'hed mervel evit ar gourrenkad-bed. E Bro-C'hall ez eo tost heñvel an traoù evit tud ar *Show business*, a-gleiz ez int evit an darn vrasañ, hag a-du gant an holl gemmadurioù kevredigezhel ha degemer an dreuztiriaded.

Amparet eo an trede kelc'h gant an aozadurioù nann-gouarnamantel (ong/ang) : gwelet e oa dreist-holl an aozadurioù-se, betek nevez 'zo, evel aozadurioù a garitez o tegas skoazell d'ar re baour er broioù pell, war-lerc'h

brezelioù, kevergolloù¹⁷, naonegezh... Hogen, hiviziken ez int buket evit bezañ lerennoù-rod ar gourrenkad-bed evit pezh a sell ouzh aloubidigezh Europa gant an dreuztiriaded o tont eus Afrika pe eus ar Reter-Krenn. Da skouer ar vag Aquarius eus an ANG *SOS Méditerranée*, ne skoazell ket tud en argoll er mor : e darempred emañ gant an dreizherion, un bellgomzadenn diganto hag e tered ar vag da zastum ar bagadoù treuztiriaded prientet evito e Libia, evit o c'has da Europa, war-lerc'h bezañ trufflet digant pep hini 3000 € Ret e vefe d'an UE ober paouez an trafik-se, peogwir ez eo anat an touellerezh, met ne ra netra peogwir ez eo a-du gant ar gourrenkad-bed. Koust a ra ker fredañ ur vag evit an oberatadennoù-se, neuze e vez skoret an ANGoù gant ar diazezadurioù¹⁸ bedelour hag unan a zo oberiant kenañ a zo *Open Society Foundations* George Soros, hon eus komzet alies diwar e benn er gelaouenn-mañ, bezant war an holl dalbennoù evit freuzañ ar sevenadurezh europat, dreist-holl er broioù kreñv ar gatologiezh enno, evel en Iwerzhon.

Amparet e vefe ar pevare kelc'h gant ar begennoù publik o trubardiñ ar bobl.

N'int ket dre ret pinvidik-mor evel re ar c'helc'h kentañ, met tremenet ez int dre an holl skolioù-meur e-lec'h ma vez kelennet kealiadurezh an nemeurveliezh¹⁹, ENA hag all... Degemeret o deus savboent ar gourrenkad-bed, hag a-benn ar fin en em lakaet ouzh e servij. Setu perak ne reont netra evit herzel alouberezh Europa gant an dreuztiriaded, ha zoken ez eo hogos torfedelaet ganto ar re n'int a-du ganto, evel m'en deus graet E. Macron nevez 'zo o komz eus "*lavar kasonius*" diouzh perzh e eneberion, hag eus "*lovrentez ar vroadelouriezh*" oc'h en em strewiñ en Europa.

Ha Breizh e kement-se ? Daoust hag ez eo fur komz bepred eus broadelouriezh evit dieubiñ hor bro ? D'am meno ar respont a zo Ya ! An hanter-ziarbennoù ne gasont nemet da ziskoulmoù jilgamm ha koll amzer. Gwelout a reomp petra a zo deuet da vezañ an Emsav war-lerc'h bezañ distaolet anezhi.

Donwal Gwenvenez

¹¹ Korralvez : *microcosme*.

¹² Lankañ : *commander, mettre en marche*.

¹³ Destloù an arz : *les canons de l'art*.

¹⁴ Amparañ : *constituer*.

¹⁵ Adkaser : *relais*.

¹⁶ Dremmour : *acteur*.

¹⁷ Kevergoll : *catastrophe*.

¹⁸ Diazezadur : *foundation philanthropique*.

¹⁹ Nemeurveliezh : *oligarchie*.

Sant Maeldan e Blaen

Ur wech gounezet Bro-Naoned gant Nevenoe war-dro 850, ha war-lerc'h e varv e 851, gant e vab Erispoe e voe Blaen, kreizenn a-bouez, hag e dolead trevadennet gant ar Vrezhoned hag aozet eo bet hervez gizioù ar Vrezhoned ha parrez Blaen, bras a-walc'h, a voe rannet e "breuriezhoù", gant ur chapel, ur vered en-dro da bep hini, hag ur sant patron a oa peurliesañ ur sant brezhon, bet enoret seulabred er vro diouzh e teue ar Vrezhoned-se : Leon, Kernev, Treger, Gwened... Ul lod mat eus ar breuriezhoù-se o deus miret o anv brezhonek, hag unan zoken a zoug anv sant Miliaw, dindan ar stumm "*Millac*" hiziv, met adkavet gant ar stummoù lies : "*Milla*", "*Millat*", "*Millau*", "*Millot*" evit envel pradeier ha parkeier er barrez a-bezh, a-gevret gant e vab, sant *Melar*.

Miret eo bet enta eñvor ar sent brezhon kozh-se, met meur a hini a zo bet amsavet²⁰ gant sent gall pe sent muioc'h anavezet e Roma, pe c'hoazh distummet o anv evit klotañ gant anv ur sant gall, evel sant Telo deuet da vezañ sant Eloi, met adkavet e anv en ur geriadenn evel "*Bredeloup*" (bre + Telo) bet distaget diouzh parrez Blaen tro-dro da 1850 evit krouiñ parrez nevez Lokmaria-al-Lanneier, pe c'hoazh gant pradeier anvet "*Brodelo*" (bro + Telo) er breuriezh "*Eff*". Evel m'hon eus adkavet anv Sant Gourlae²¹ e anv kastell-kreñv Blaen, anvet "La(n) Groulaie", evit "*Langourlay*" gwechall, hag e-barzh anv ar gêriadenn "*Le Crolay*" evit "*Lok-grolay*" gwechall, e hañval bezañ anv sant "*Maeldan*" en ul lec'h anvet "*Maldan*" hiziv, hag a c'hellfe bezañ bet gwechall "*Lok-Maeldan*". Emañ lec'hiet ar "*Maldan*"-se en ur vreuriezh anvet "*Le Flan*", ha tra iskis, ar vreuriezh e-kichen a zo "*Eff*" hec'h anv. Mar bez lakaet kichen-ha-kichen anvioù "*Eff*" ha "*Flan*" hon eus "*Eff+flan*" da lavarout eo sant "*Effflamm*" a zo patron ur breuriezh e Gwenvenez-Penfaw. War ar pezh a hañval, ez eus bet krouet breuriezhoù bras kerkent war-lerc'h 851 gant ar c'hentañ trevadennerion breizhat galvet gant Erispoe evit poblañ ha derc'hel an tiriad, war-lerc'h, gant donedigezh trevadennerion all, e tle bezañ bet rannet ar breuriezhoù bras e daou pe dri, hag anvet sent patron all.

²⁰ Amsavet : *remplacé*.

²¹ Gwelout « *Kastell-kreñv Blaen* » e Kannadig 105.

N'eo ket "*Maldan*" ur gêriadenn, a-boan ur pennkêr peogwir ne oa bet savet nemet un ti el lec'h-se. En abeg ma oa digenvez an ti ne oa ket bet lakaet an tredan e-barzh. An tiegezh diwezhañ a feurmas an ti, tud paour anezho, a ouezas kaout e walc'h gantañ. Pa varvas an tad hag ar vamm, ne chomas en ti memet ar mab diwezhañ chomet dizimez. Abaoe pell endeo ne oa ket bet trezalc'het an ti gant ar perc'henn. Abenn ar fin, o vezañ ma oa tost rivinet an ti, eo bet divizet gant ar gumun diskarañ ar mogerioù, ha ne chom bremañ el lec'h-se, nemet ur bern bras mein.

Un deiz ma tremenen dre aze gant ur c'hile din, e lavaris dezhañ o welout ar bern mein gourizet gant ur vardell graet gant treuzelloù hent-houarn kozh atoret, sanket en douar, ha liammet etrezo gant goulazh e koad kistin : "Plijout a rafe din gouzout eus pelec'h e teu an anv-se "*Maldan*". Ha va mignon da respont din diouzhtu : "N'eo ket diaes, bez' e talvez "*mal au dent*", "*mal de dent*" (bez' e komzemp e galleg), ha da zisplegañ din ur vojenn, evel ma-z eus kement diouto e Breizh, he doa lavaret dezhañ e vammgozh : bez' e oa gwechall gozh aze un doare maen-hir - steuziet hiziv en abeg ma-z eo bet digoret eno ur vengleuz evit tennañ mein da sevel tiez -, anvet "Dant ar ramz". Ar re o doa poan-dent n'o doa nemet rimiañ o jod war ar maen evit ma steuzfe ar boan.

Ne rois ket kalz a bouez d'ar goñchenn-wrac'h kozh-se, evel-just, met e lakais kentoc'h an anv "*Maldan*" e-barzh *Google* hag e kouezhis war "*La Revue Celtique*", bloavezh 1909 – Vol. XXX, niverelaet gant "*University of Ottawa*", Kanada. Adalek ar bajenn 228 e oa "*Le noms des Saints bretons (suite)*" gant Joseph Loth, hag er bajenn 264 e kavis sant "*Meldan*" hag e note Joseph Loth : *Loc-Meldan* e Baod evit "*Loc-mael-tan*" (emañ e Sant Barteleme e gwirionez, e kichen Baod, ha skrivet bremañ "*Lomeldan*"). Notiñ a rae ivez "*Plu-maudan*" (22350) e-lec'h "*Maudan*" a vije bet hervez stummoù kozh evit "*Mael-tan*" ivez. Hag e note ar stumm ar muiañ azonus a vefe "*Plo-maldan*" en anv "*Judicael de Plomaldan*" e-barzh un diell eus 1130 e Kartular Sant Melan (Anc. Ev., III, p. 338). Ne note ket Joseph Loth "*St Maudan*" (22600) na "*Lanvaudan*" (56240), e

kanton Gwezel, o deus d'am soñj an hevelep sant anver.

Perak “*Maldan*” Blaen n’eo ket deuet da vezañ “*Maudan*” ? Da gentañ “*Mael*” o tont da vezañ “*Mal*” a zo un emdroadur levezonet gant ar romaneg a gaver gant “*caer*” o tont da vezañ “*car*” e Breizh-Uhel (gwelout “*Carcouet*”, “*Carheil*”, *Carquefou*”) pa-z eo “*kêr*” e brezhoneg. D’an eil “*mal*” (“*droug*” e galleg) a zeu da vezañ “*maw*” e galloweg, setu perak “*Plumaudan*” ha “*St Maudan*” lec’hiet er-maez eus ar brezhonegva o deus emdroet hervez

emdroadur ar galloweg. Evit “*Lanvaudan*” a zo memestra er brezhonegva ez eus marteze un displegatur all. D’an eil “*Maldan*” a oa ul lec’h dister, nebeut meneget gant an dud, en abeg da-se e vije chomet er stumm-se er yezh voutin. Met se ne vir ket da sant *Maeldan* bezañ bet dibabet da sant patron o breuriezh nevez gant trevadennerion o tont diouzh parrezioù e-lec’h ma veze enoret evel e “*Plumaeldan*” ha “*St Maeldan*” gwechall-gozh.

Yann MIKAEL

Marsel Blanchard, person Kistinid *gant T. Gwilhmod*

Diwar-benn an Aotrou Blanchard e karfen skrivañ ur ger bennak amañ. Emañ hiziv e ti ar veleien gozh e Keranna-Wened, kozh-kabac’h, oc’h ober e dalaroù. Ur vuhez pinvidik en deus bevet.

E vugaleaj ha penaos e teuas da Vreizh²²

War-dro ar bloaz 1923 e oa bet ganet hag e bourk Gourin e oa bet savet e galleg. Un tad-kozh dezhañ a oa o chom en un ti-soul dister-tre e Kerbeskontez Langonned. Pa’z ae d’e welout, emezañ, e oa evel ur voger etrezo, pa ne ouie ket Blanchard Bihan



brezhoneg ebet hag e dad-kozh galleg ebet. Kalz a garantez a vage evit e dad-kozh hag e stagas da studiañ brezhoneg o lakaat e anv da SKOL OBER, war-lerc’h bezañ bet dizoloet e presbital Gourin levraoueg dilezet an Aotrou Martin, bet person Gourin betek 1935. Tro en doa bet ivez da gejañ un nebeudik gant an Aotrou Perrot ha Roparz Hemon. Dreist-holl avat e reas anaoudegezh gant Youenn Olier ha Youenn Kraff e 1945 pa voent enluet a-gevret e Montroulez.

An FLB kentañ, Beleion Breizh, Kristenion Breizh

Deuet da vezañ kure e Pondivi, e karg eus « Kerlenn Pondi » da vare an FLB kentañ, e kemeras perzh a-zevri er stourmadenn kaset en-

dro gant ar veleion vrogarour a-benn dibrizoniañ ar pevar beleg a oa bet toullbac’het da heul an darzhadenn e Prefeti Sant Brieg. 127 sinadur eus beleion a Vreizh a zastumas o sevel « Beleion Breizh » ! War-lerc’h an darvoudoù-se ma veze sellet outañ gant isprefed Pondivi e gaou evel unan eus « Chefoù-bras ar FLB » e klaskas bodañ « Beleion Breizh », o lec’hiañ an traoù war dachenn ar feiz, met ne voe ket kalz emvodoù. Nebeut goude e voe savet « Kristenion Breizh » a vodas stourmerion an Emsav, laiked ha beleion. Er penn-kentañ ez ae en-dro ar framm-se e galleg dreist-holl.

Kristenion Breizh ha Fidélité Catholique

N’en em gleve ket mat an Aotrou Blanchard gant e eskob, ken war dachenn Breizh ha war hini ar Bastorelezh, da heul Sened-meur Vatikano II. Ne zistaole ket ar Sened-Meur met diskouez a rae e veze dispac’het pep tra war zigarez eus ar Sened-Meur, daoust ma ne oa ket skrivet ar c’hemmoù-se, na c’hoantaet gant ar Bibien. Gant e vignon Joachim Palud, person Kervignag hag aluzenner eus ar pezh a chome eus Bleun-Brug Bro-Guéned, e savas Kristenion Breizh (ur c’hannadig talbennet Bleun-Brug Bro-Guéned –Kristenion Breizh a zeuas er-maez d’ar mareoù-se) hag ar gelaouenn c’hallek « Fidélité Catholique ». Buan e voe roet lusk da gKristenion Breizh gant sikour Youenn Olier ha Paol Kalvez. Ar re-mañ e oa bet dilezet ganto

²² Lenn Imbourc’h niv. 160, miz Ebrel 1983, p. 165-196, « Emziviz gant Marsel Blanchard », bet graet gant Herve Lanndiern (Yann-Vari Bouessel Du Bourg)

framm « Skol an Emsav », daoust m'oa doa e savet, dre ma oa bet roet lamm dezho e bodadeg vras SAE, « ar re gozh » begannelourien gristen, a-enep « ar re yaouank » poblelour-kleizelour.

Fidélité catholique a veze liestennet e ti Person Kistinid. Betek war-dro mil koumananter a dapas ar gelaouennig dister-se, a stourmas a-enep « emzistrujidgezh » an Iliz. Renet e oa gant an Aotrou Blanchard, a sine e c'herioù-stur evel-hen : « Marcel Blanchard, curé de campagne ». Lennet e veze gant an noñs abostolek e Pariz.

Legader an Aotrou Bertho

Kalz a dud ne veizont ket mat ar perzh bras a voe hini an Aotrou Banchard a-enep « emzistrujerezh an Iliz » er bloavezhioù seikont-eikont. An Aotrou Bertho en devoa fiziañs bras ennañ da skouer, p'en doa e anvet da legader, da lavarout eo en doa karget anezhañ d'ober war-dro e destamant. An aotrou Bertho a oa bet sekretour an Aotrou 'n eskob Lefebvre da vare Vatikano II ha daoust da se ne oa ket aet d'e heul penn-da-benn p'en doa savet Breudeuriezh Sant Pius X. Brezhoneger henvoazel e oa-eñ, eus kostez Noal-Pondi a gav din. Savet en doa un urzh leanezed, « Dominikadezed ar Spered Santel », a brenas kastell Markiz Pont-Kalleg e Berne d'ober anezhañ kreizenn o urzh. An aotrou Palud a yeas eno war e leve, da chom en ti-gward, evel aluzenner.

Person Kistinid

Da heul ar reuz a oa bet gant ar FLB kentañ e voe anvet da berson e Kistinid, ur barrezig kollet etre Baod ha Bubri, etre Gwened-uhel ha Gwened-izel, war ribl ar ster Blañovezh. Ur seurt treuzvarc'had a voe etrezañ hag an eskob : ren a rafe e barrezig evel a garfe, mestr en e barrez, gant hollc'halloud ar bersoned a-raok Vatikano II²³. Neuze e oa un tammig eskob en e barrez. E-pad pell e nac'has kemer perzh e daskeitadur beleion an eskopti, ur c'hef boutin etre holl veleion an eskopti a-benn sikour ar veleion a oa e parrezioù paouroc'h eget ar re all. Moarvat e soñje dezhañ e ranke ar bersoned labourat « war o c'hont » a-benn dastum diner an Iliz en un doare efedusoc'h, ha n'eo ket bevañ evel amaezhidi o c'hortoz dinec'h o

²³ Arabat krediñ e oa bet a-enep person Kistinid ouzh Vatikano II, ar c'hontrol eo : a-raok ar sened-meur e oa penn-a-raok en eskopti a-benn neveziñ al liturgiezh ha pergen ar c'han.

c'hopr bep miz digant o mamm ar stad vadelezhus.

E abeg da se e kendalc'has keit ha ma c'hellas da ober tro ar barrez o vont a di da di da vare gouel Mikael. Bez' en doa ur sparfer gant dour benniget "inkorporet" hag ez ae, hep koll amzer da vennigañ pep ti eus an traoñ d'ar solier, hag en em gave er gegin da gemer ar golo-lizher a c'hortoze anezhañ war an doubier koaret... Bez e oa tiegezhioù na oant ket evit mont alies d'an oferenn a roe memestra evel-se o diner d'an Iliz, hag evel-se e c'hellas an Aotrou Blanchard kas kalz arc'hant d'an eskopti, tra ma koazhe buanoc'h diner an Iliz er parrezioù tro-dro...

Pa oa en em gavet e Kistinid e oa teir skol gristen. Gwerzhañ a reas unan, kempenn a reas hini Pont-Degan da gaout lojeiz mat da feurmiñ, hag e reas labourioù bras war-dro an drede. War he moger bras diavaez e lakaas penturiñ e lizherennoù bras-tre anv nevez ar savadur : « TI-PARREZ KISTINID » e-lec'h e tegemere kampoù « Kristenion Breizh » hag « Emglev An Tiegezhioù » pa ne oa mui kristen an aergelc'h e kampoù « Kamp Etrekeltiek ar Vrezhonegerion ». Kement-se holl a verkan da ziskouez ez eo bet moarvat an aotrou Blanchard ar gwir person diwezhañ e Breizh, mestr war madoù ar barrez. Ur wech en doa marc'hataet taer gant ar gomun a-benn bezañ paeet d'ober war-dro kleier an Iliz ; ur wech all em boa gwelet anezhañ oc'h ober war-dro kontoù ur familh a oa e mar da vezañ lakaet dindan ward gant ar servijoù sokial. Amprestañ a rae arc'hant digant ar familhoù kristen, digampi ha war verr dermen, hag ar familhoù-se a leze an arc'hant-se gantañ alies, pa 'z eo gwir n'eo ket re ger ober ur chekenn evit e berson a-benn bezañ suroc'h da vont d'ar baradoz ! Meret aketus e oa e barrez gantañ ha nac'het en doa lakaat madoù ar barrez e dalc'h « Kevredad madoù diloc'h an Eskopti ». Bez ez eus bet tud o deus legadet o holl vadoù d'ar barrez, evel ma oa ar c'hiz gwechall, dre ma oant divugel, met ne vire netra evitañ e-unan.

Ar Barrez

Ur wech, e dibenn ar bloavezhioù 90, e oa deuet Pêrig Keraod da zerc'hel un emvod en e barrez gant ar spi da reiñ lañs en-dro da vBleimor. Dibikouzet-naet e voe gant ar person a zisklerias ne oa netra da c'hortoz eus Kistinid, a veze digristenaet evel ar parrezioù all, diwar levezon ar skinwel, ar c'hazetennoù, ar skolioù, ha

kement 'zo. Ne oa ket un enezenn nag ur c'hreñvlec'h zoken. Ar vugale donezonetañ a guitae ar barrez kerkent hag ar skolaj, ha ne chome er vro nemet ar re n'o doa ket kavet an dro da vont da chom e kêr da gaout ur gopr uheloc'h. Ne oa ket Kistinid patrom eorizhek ar Vreizh istorel a hiraezhe Pêrig Keraod dezhi. Ar Vreizh kristen ha brezhonek-se a oa aet da get gant drouklazh an Aotrou Perrot un abardaevezh a viz Kerzu 1943.

Sonerezh Vreizh

Un den laouen e oa an Aotrou Blanchard, laouen gant e vuhez a veleg hag a berson. Evel Maodez Glanndour e vourre gant sonerezh Vreizh, koulz ar c'hantikou hag ar sonioù all, kanaouennoù ha dañsoù. Dre ar sonerezh e oa deuet da Vreizh, e-pad miz Mari e Gourin, gant ar c'hantik « Ni ho kemer, Mari evit hor mamm... » da skouer. Savet en doa ul laz-kanañ bihan evit an oferenn-bred e Kistinid, hag e veze kanet koulz e galleg, latin ha brezhoneg, eveljust.

Pa oan 16 vloaz, war-dro hañvezh ar bloaz 77 em boe tro da stekiñ evit ar wech kentañ ouzh dor werennek Ti-Person Kistinid. Dont a raen a-berzh Youenn Olier ha ne raen nemet tremen gant va strakell, o tont diouzh Lokeltaz-Ruiz da vont war-zu Kastell-Paol, o klask ul lec'h da ziskuizhañ un tamm ha da verennañ. Ne voen ket degemeret mat gantañ siwazh rak unan bennak a oa gantañ dija en e bresbital. Diwezhatoc'hik avat e ris donoc'h anaoudegezh gantañ ha gant Viriginie ar garabasenn. Tro em boe da gavout ur garabasenn all evitañ pa oa aet re gozh Virginie : Marie-Josèphe, eus Plouzane,

a gejis ganti dre vurzud er Folgoad pa oa aet di da c'houlenn digant ar werc'hez petra 'rafe neuze pa oa deuet da vezañ intañvez... Bez' e oa bet ivez Roisin Og O Tuama en e bresbital, ur plac'h a benn eus ur familh broadelourien iwerzhonat, a yae e ti an dud da gas anezho d'an oferenn war ar sizhun e chapel Sant-Matelin...

Ur bersonelezh diseurt en doa an Aotrou Blanchard : broadelour, brezhoneger bet desket ar yezh gantañ, koulz KLT ha Gwenedeg (gouest e oa da brezeg e rannyezh Kistinid), muzikaner, merour mat e barrez, rener laz-kanañ ar barrez, kelenner war ar sonerezh en e bresbital, stourmer brezhon ivez. Kalz arc'hant personel en doa roet da dTiegezh Santez Anna betek o disparti reuziek diouzh Kistinid.

Klozadur :

Gant Marsel Blanchard ha Youenn Olier, an daou vignon bras o doa graet anaoudegezh an eil gant egile e-pad o amzer koñje e 1945, hon eus an daou c'her eus ar sturienn « Feiz-ha-Breizh ». Youenn Olier diouzh un tu, dispenner roudoù Roparz Hemon, a viras ouzh skritur **Gwalarn** – ha dre-se hêrezh Skol Walarn, broadelour dre anien - da vezañ dilezet gant al Liberasion, ha Marsel Blanchard, person diwezhañ Kistinid, a vire en e bresbital, dindan e wele, soutanenn abostol Feiz-ha-Breizh, Yann-Vari Perrot, da zeiz e zrouklazh. O-daou a ziazezas **Kristenion Breizh**, a en em vodas e presbitalioù beleien an emsav betek 1993, ur vreuriezh a bedenn hag a studi e-kichen **Emglev an Tiegezhioù**

Nedeleg : leurenner en em ra an Aotrou Doue

Klevet em eus meur a brezegenn da geñver oferenn Nedeleg ha dalc'het em eus soñj e oa bet displeget alies enno dodenn e pebezh dienez e c'hoarvezas ganedigezh Jezuz : *“Hag e-pad m'edont eno (Betlehem) e teuas eviti (Mari) an amzer da wilioudiñ hag e c'hanas he mab kentañ-ganet ; e vailhurañ a reas hag e lakaat en e c'hourvez en ur prezeb, dre ma ne oa ket plas evito en ostaleri”* (Lukaz 2: 6-7). N'eus nemet Lukaz a gomz eus ganedigezh Jezuz e Betlehem en ur c'hraou, ha c'hoazh ne ro ket kalz munudoù, met trawalc'h e oa gant dibenn ar frazenn diwezhañ : *“Jezuz lakaet en ur prezeb, dre ma ne oa ket plas evito en ostaleri”*, evit ober ur brezegenn e-lec'h ma oa diskouezet

ne oa ket bet enoret Jezuz evel ma tere gant an dud adalek e c'hanedigezh peogwir ne oa bet graet plas d'e vamm, tost da wilioudiñ, en ostaleri.

Tu 'zo koulskoude da empentiñ ur frammc'hoari²⁴ disheñvel : an Aotrou Doue e-unan o leurenañ²⁵ pep tra. Da gentañ e oa bet gouzavet gant meur a brofed – a gomz bepred dindan awen Doue – e ranke Jezuz bezañ bet ganet e Betlehem. D'an eil ez eo fazi impalaer Roma ma oa kement a dud en ostaleri en deiz-se, en abeg d'e enskrivadeg evit gouzout pet a

²⁴ Frammc'hoari : *scénario*.

²⁵ Leurenañ : *mettre en scène*.

dud a oa en impalaeriezh. Mar ne vije ket bet a-du an Aotrou Doue, en dije kaset dezhañ unan eus e aeled evit lavarout dezhañ : “*Ave Kaezar Aogustus, deiziad da enskrivadeg a zirenk an Aotrou, gortoz kentoc’h an nevez-amzer evit hen ober, rak an Aotrou en deus un dra kalz pouezusoc’h da aozañ tro-dro da ziwezh ar bloaz*”, hag e vije bet renket an traoù. Met, ahent-all, evit petore abeg all e vije deuet Jozef ha Mari da vBetlehem ? A-du gant ar frammc’hoari-se e oa an Aotrou Doue. Ur brouenn eus ragevezh-Doue a gaver gant ar welourez italiat Maria Valtorta, he deus skrivet kalz muioc’h a draoù eget Sant Lukaz war ganedigezh Jezuz e levr kentañ hec’h oberenn “*An Aviel evel m’eo bet diskuliet din*”. Diskouez a ra beaj poanius Jozef ha Mari o vont da vBetlehem, Mari o tougen azezet war an azen ha Jozef o kerzhout war droad en he c’hichen. War an hent ez int harzet, gant tud all a ra ar veaj ganto, gant laeron a rañson anezho. Penn al laeron, o welout stad Mari hag an treut a beadra a zo ganto, a lez anezho da dremen hep kemer netra diganto. Ha Maria Valtorta da skrivañ : ar penn-laer-se a voe al laer mat bet kroazstaget e kichen Jezuz war ar Golgota. C’hwil ‘wel, rakwelet e oa bet pep tra gant an Aotrou.

Tud ‘zo o deus soñjet er babig-Jezuz nevez-c’hanet, kousket e yenijenn ur staol, leun a redoù-avel, hag o deus ijinet alan an ejen hag an azen oc’h astommañ ar babig. Brav eo ar skeudenn, met n’eo ket faos. Un deiz, e-pad ur goañv yen, e ti-feurm va zud, e stokas ouzh hon dor ur c’hlasker-bara. War-lerc’h bezañ lonket ar soubenn domm a roas dezhañ va mamm, e c’houlennas ma c’helle mont da gousket e kraou ar buoc’hed. Me ha ne oan nemet daouzek pe

trizek vloaz ha nebeut a skiant-prenet ganin, da lavarout dezhañ : “*Ket er staol memestra, gwelloc’h e viot er grignol*”. Hag ar c’hlasker-bara da eilgeriañ din : “*Nann va faotr, skornet e vin er grignol, a-enep er staol war ur gwele plouz ha tomnder ar buoc’hed en-dro din, e kouskin evel ur babig*”. C’hwil ‘wel n’eo ket bet riellet ar babig-Jezuz er staol.

Fellout a rae da Zoue ma teufe tud ha loened da enoriñ, da azeuliñ e vab e nozvezh e c’hanedigezh, e kreiz an natur bet krouet gantañ. Mar bije bet en ostaleri, en ur gambr ostaleri, ne vije ket bet tu d’ar vesaerion gant o deñved, o givri hag o c’hiier-deñved, titouret gant an aelez da zont eno, ha war-lerc’h, e vije bet dioueret ivez al livourion o deus livet kant ha kant gwech ganedigezh Jezuz, eus arvest marzhus kraou Betlehem. Torret e vije bet boemerezh Nedeleg. Soñjet en deus ivez an Aotrou Doue er vugale vihan a zeuio da vamiñ dirak krevier Nedeleg gant o vammoù o respont d’o goulennoù : perak emañ ar babig-Jezuz en ur prezeb gant plouz, perak ez eus un ejen hag un azen, perak ez eus an holl deñvedigoù-se ? lod anezho o chom gant o c’herent er c’hêrioù bras n’o deus gwelet biken al loened-se. Soñjet en deus an Aotrou Doue zoken el laikourion a raio un deiz o seizh gwellañ evit lakaat ar c’hrevier Nedeleg da steuziañ diouzh hor plasennoù, diouzh hon egor foran, rak un deiz e tibikouzo marteze o daoulagad, ha forzh penaos e savo bepred kement a dud evit o difenn.

C’hwil ‘wel, ul leurenner mat eo bet an Aotrou Doue. *Nedeleg laouen d’an holl !*

Tiernvael

Notennoù diwar an darvoudoù gant Yann Maneguen

Hervez an INSEE evit Rannbarzh Breizh mac’hagnet e 2017 e save ar boblañs da 3 337 000 annezad : ur c’hresk a 0,43 % a drugarez d’an enbroerezh ha daoust m’eo uheloc’h dre vras ar verventi eget ar ganedigezhioù. 34 700 tremenvan da zo bet e 2017, ur c’hresk a 0,7 % war ur bloaz. Kement-se a washao, hervez an INSEE dre m’en em gavomp bremañ gant rummad ar baby boomers.

Oad keitat ar gwilioudoù a gresk : tost 31 bloaz. 377 000 ganedigezh a zo bet e 2017 (d.l.e. 14 000 nebeutoc’h eget e 2012). Kontañ a raed

1,79 bugel dre vaouez e 2017, e skoaz 2,02 e 2010.

Dimeziñ a ra nebeutoc’h ar Vretoned eget ar Frañsizien hiviziken, ha torr-dimeziñ a reont muioc’h. Ar baotred gent e 2017a zo sañset bevañ betek 78,4 bloaz, hag ar merc’hed 6,5 bloaz ouzhpenn.

E miz Meurzh 2017, e stern ar c’houlzad evit ar poblaters bet aozet gant Prezidant Republik Turkia, hag e kenarroud tennderioù gant lod broioù europat (ma oa en o zouez Alamagn hag an Izelvroioù enebet ouzh lezel maodierned

turkiat da zont evit bodadegoù politikel dirak o c'henvroad turkiat enbroet en Europa) en doa Recep Tayyip Erdogan kaset ur gemenadenn war Twitter o c'hervel e genvroiz o vevañ en Europa da ober pep hini "pemp bugel" evit en em zialañ diouzh an direizhderioù graet dezho, ha dont da vezañ "Dazont Europa". Komprenet eo bet pep tra gant Erdogan. Emañ Europa bepred oc'h en em lazhañ muioc'h-mui dre lazhañ he bugale gant ar sioc'hanerezh ; dre he stuzioù bepred dirolletoc'h, gant hec'h annezidi dinerzhet na fell ket dezho ersaviñ evel ran Galvani, hag he harzoù freuzet, ez eo Europa da gutuilh evel ur frouezhenn azv, ha da adpoblañ ha da islamekaat e berr amzer.

Ar c'hrevier Nedeleg hag ar c'hroaziou a zeu da vezañ ret en holl skolioù provink Trento er rannbarzh emren Trentin- Adige-Uhel, tost an harzoù etre Italia hag Aostria. Bez' ez eo Maurizio Fugatti – gouarnour Provink Trento hag ezel al Lega Nord – en deus kemennet an dra-se da Gambr ar C'huzul Provinkel. Hervezañ ez eo ret a-nevez stuziañ gwriziennoù kristen an hengoun italiat.

Aleksander Soljenitsyn, a-raok e varv e 2008 en doa lavaret : *"Bez' e c'hell ur bobl koll he riegezh, ha neuze he frankiz. Mar bez miret ganti hec'h hennadelezh e teuio a-benn da ersaviñ. Mar bez kollet ganti hec'h hennadelezh, e steuz ar bobl-se"*. Difenn an hennadelezh a zeu da vezañ hiviziken, evit an abeg-mañ, dirannadus diouzh arbenn ar riegezh en Europa. (*La Super-classe mondiale contre les peuples*, Michel Geoffroy, p. 399).

En un dazaters nevez gant ar pemdezieg breizhveurek *The Guardian* he deus Hillary Clinton broudet an UE da vestroniañ lanv an treuztiriañ. Diskleriadurioù a c'hell souezhañ diouzh perzh an danvez-prezidantez gozh demokrat. Diskleriet he deus peurgetket : *"Me gred he deus ezhom Europa da vestroniañ an treuztirañ, dre ma-z eo ar pezh en deus enaouet ar flamm"*, a-raok da c'hervel gouarnamantoù Europa da gas ur arouez kreñvoc'h o tiskouez *"ne c'hellint mui kenderc'hel da ginnig repu ha skoazell"*. Ha gant ar ger *"flamm"* e tezanve *"ar begozh o kreskiñ gant ar boblourion a-zehou"*. Degaset he deus da soñj ivez ez eo, evit un darn, war dodenn-se an enbroerezh ez eo bet gounezet an dilennadegoù e USA gant Donald Trump, hag heñvel evit trec'h ar Brexit e Breizh-Veur. Er mare-mañ ma-z eo ar Stadoù Unanet begozhet gant treuztiriaded o tont a-vil-vern eus

Kreiz-Amerika war skouer alouberezh Europa ha delanket en un doare heñvel gant ar vedelourion, ez eus tu d'en em c'houlenn ha ne klaskfe ket Hillary Clinton da oberiañ dre zazlamm : mar befe ersavet kreñv gant gouarnamantoù Europa a-enep alouberezh an dreuztiriaded e vefe ur skouer vat evit Amerika. Ha traoù na c'hell ket bezañ lavaret du-hont marteze, en abeg d'he saviad a ikonenn a-gleiz a c'hell bezañ lavaret en Europa. Forzh penaos, daoust da vezañ arlivet komzoù Hillary Clinton, ez eo un dianzav evit Angela Merkel, E. Macron hag holl atebieion bolitikel an UE, engouestlet war hent an enbroerezh a yoc'h abaoe enkadenn 2015.

Asia Bibi a zo anv ur gristenez pakistanat, bet kendaonet div wech da vezañ krouget evit blasfem : saotret he dije dour ur puñs miret d'ar vuslimiz, dre evañ eus an dour-se. War-lerc'h bezañ bet toullbac'het e-pad nav vloaz, eo bet dieubet en diwezh hervez divizadenn Lez-varn Uhel ar Pakistan, o terriñ barnadenn 2010 hag hini 2014. Dieubet eo bet met ne c'hell ket kuitaat ar vro. Muslimiz baranet a fell dezho bepred he c'hrougañ. Drouklazhet eo bet Gouarnour muslimat ar Penjab, Salman Taseer, gant e ward-korf, evit bezañ kemeret, ez-foran, difenn Asia Bibi, e miz Genver 2011 ; daou viz diwezhatoc'h eo bet drouklazhet d'e dro Shahbaz Bhatti, maodiern kristen ar minorelezhioù relijiel, evit an hevelep abeg. Meur a vro en Europa o deus lavaret e oant prest da zegemer Asia Bibi hag he ziegezh, met nac'het eo bet gant gouarnamant Breizh-veur war an digarez e vefe ar vro en arvar da gaout dizurzhioù diouzh perzh ar Bakistaniz a zo niverus-tre e Breizh-Veur. An Islam relijion a garantez, a beoc'h hag a zamantegezh, piv a c'hell c'hoazh krediñ er gevier-se ?

Adunvanidigezh Breizh : Ervennadeg "Bretagne Réunion/Breizh Unvan" he deus dastumet ar 100 000 sinadur goulennet evit ma vefe aozet ur guzuliadeg eus poblañs departamant al Liger Atlantel a-zivout distro Bro-Naoned da Vreizh melestradurel, evel aotreet gant lezenn diwezhañ adaoz an tirriadoù. Fiziet eo bet ar 100 000 sinadur da Guzul departamant Liger Atlantel d'ar 27 a viz Du. Hor gwellañ gourc'hemenoù da izili Breizh Unvan evit al labour-se kaset da benn. Petra vo graet bremañ ? Respontet en deus Philippe Grosvalet, prezidant ar C'huzul. Nac'het e vez gantañ lakaat da votiñ annezidi an departamant.

Kemeret e vo an divizadenn gant an 62 guzulier da lakaat da c'hoari pe nann ar gwir da zibab, d'ar 17 a viz Kerzu. Gant ur C'huzul etre daouarn izili ar PS gall enebet a-walc'h ouzh adunvanidigezh Breizh e oa da c'hortoz e ziegi da aozañ ar guzuliadeg-se, met war skouer emsavadeg ar "Jiletannoù Melen", e vefe arvarus marteze droukvoziñ²⁶ ur wech c'hoazh ar bobl, seul vui ma-z eus bet – pa oa sontadegoù – atav etre 65 ha 70% eus an dud e Liger Atlantel a-du gant an adunvanidigezh-se.

Ar "Jiletannoù Melen" : Loc'het diwar un afer a daosoù re uhel war an trelosk, e hañval poblañs Bro-C'hall bezañ degaset, e-barzh paner he droukklemmoù, holl ar pezh he deus bet da c'houzañv digant he renerion fall abaoe bloavezhioù ha miret war he c'halon. Gwashaet eo bet ar saviad gant renerezh Macron, atav neuz ur studier dilerc'hiet warnañ, gant e frazennoù drouklazhus evel doareañ michourezed Lazhdi Gad e Breizh da vezañ dizesk, gant un toullad reolennoù ouzhpennet dizehan, evel gwiriadur kalvezel ar c'hirri kreskaet kalz, an tizh war an hentoù departamantel bevennet da 80 kmh hag atav muioc'h a radarioù war an hentoù o liesaat an telloù-kastiz d'ar vleinerion. Ha bremañ

²⁶ Droukvoziñ : *mécontenter*.

taosoù dreistvuzul war an trelosk Diesel war zigarezioù ekologel pa oa kuzuliet d'an dud, ugent vloaz 'zo prenañ kirri Diesel, sañset en amzer-se, bezañ nebeutoc'h saotrus eget ar c'hirri all. Hiziv ez eo diskleriet ar brezel d'ar c'hirri Diesel, ha kuzuliet e vez d'ar re o deus diouto d'o zeurel d'ar blotoù ha prenañ kirri tredanel, met un toullad tud gant goprou izel a c'houlenn : "Gant petore arc'hant ?" p'o deus poan seulabred da skoulmañ daou benn ar miz. Kompren a ra an dud n'eo an digarez ekologel nemet un digarez toull, goull eo kefioù ar Stad hag an taosoù war an trelosk a zo un doare evel un all da lakaat arc'hant d'o leuniañ a nevez. Diouzh un tu all e welont e-keit-se atav muioc'h a arc'hant roet gant ar Stad evit degemer an dreuztiriaded ha Macron prest da sinañ Pakt an ABU (onu) evit an treuztiriañ (d'an 10 a viz Kerzu e Marakech) pa nac'h sinañ USA, Aostralia, Israel, Stadoù Reter-Europa bet komunour, hag Aostria, Italia... Digeriñ a ra Pakt-se brasoc'h c'hoazh ha diziwezh dorioù Europa da alouberezh an dreuztiriaded, ha dreist-holl a aotre da gastizañ kement hini a vo a-enep d'an dra-se. Hir eo brec'hioù ar gourrenkad-bed, hogen ar pobloù a oar ivez distreiñ an dorzh d'ar gêr.

Buhez hon Emglev

Kemmañ anv a raio hor c'hannadig en niverenn a zeu, en ur zerc'hel an hevelep patrom avat. Bez' e vo ur c'hemmadur kentañ a-raok treuzfurmiñ un nebeut elfennoù all tamm ha tamm e kinkladur ar gelaouenn hag he danvez he fennadoù. C'hoant hon eus da gomz ivez diwar-benn Istor ha Lennegezh. A-benn 2019 ez adkasomp da soñj deoc'h kas ho skodenn a ugent euro (20€) evit ur bloavezh a goumanant, pemp niverenn ar bloaz. Skrivit ho chekenn war anv Jean-Marie Michel (Yann Mikael) en ur c'hortoz krouidigezh ur c'hont-bank a-ziforc'h.

Klask a raimp brasaat niver hor pajennoù ha niver an niverennoù bloaziek. Deiz pe zeiz, ha kelaouet e viot e koulz, e savimp ur gevredigezh nevez da gemer lec'h *E.A.T.* hag evit-se e klaskomp bremañ tud a youl vat a vefe laouen d'en em ginnig evit ar postoù a sekretour ha/pe teñzorer, koulz ha kenskriverien nevez. Gant ar c'hemm-se e buhez hon emglev eo arabat deoc'h termal da vont e darempred ganeomp (gwelout an daou chomlec'h internet er c'hombod dindan), evit ma tassono bepred ur vouezh vroadelour e Breizh. Plasoù da gemer a zo !

Mererezh :

18 €eo ar skodenn emezelañ da EAT a ro ar gwir da resev *Kannadig Imbourc'h* . Talet e vez e penn-kentañ ar bloaz (pemp kasadenn da vihanañ, pevar e 2018). Ar chekenn a zo da gas war anv **EAT** pe **Imbourc'h** da : E.A.T., c/o Yann MIKAEL 12 straed René Giraud 44130 BLAEN - Roll an niverennoù pe oberennoù n'int ket c'hoazh diviet a c'heller kaout o skrivañ pe war : <http://emglev.wordpress.com>

Skridadozerezh :

Ar pennadoù a zo da gas da : jean-mariemichel@neuf.fr pe kerlevenez@hotmail.fr, pe dre ar Post da rener Kannadig Imbourc'h : Yann MIKAEL, 12, Straed René Giraud, 44130 BLAEN. Ar pennadoù ne engouestlont nemet ar re o deus skrivet anezho. Moullet ez-prevez gant an embanner : **Emglev an Tiegezhioù** Kergreven 29800 Trelevenez. ISSN : 1144 357X